


22450 HENGOAT

Kantig Sant Maudez

Diskan : O Sant Maudez galloudus
 Parrouz Hengoat o ped
 Da vezan dirag Jesus
 He difenner bepred



- 1 Sant Maudez Patron karet, chelaouet pedennou
Ho pugale daoulinet dirag ho relegou.
- 2 Gant hon c'haeran kantikou hag a greiz hon c'halon
Enori ho relegou a fell d'imp, sant Patron.
- 3 E kreiz nerz ho yaouankis c'houi gouitas mamm ha tad
'Vit digas da Dregeriz tenzor ar c'helou mad.
- 4 Gant hon tadou c'heuz bevet hed kalz a vlaveziou
Lies gante c'heuz gouelet ha dousaet ho foaniou.
- 5 Pegen mad oa ho komzou, gant pebez karante
E roent ho c'halonou, d'ac'h c'houi, mignon Doue.
- 6 Pell zo da c'hloar en Envou gant Doue oc'h galvet
Hag evit ho vertuioù en deuz ho kurunet.
- 7 Chilaouet ho pugale, hirie, o tad karet.
Ho c'halon, ho c'harante d'ac'h a vezo bepred.
- 8 Sant evurus, hon fatron, c'houi henchas hon tadou,
Gret d'imp kaout nerz kalon da c'hounit an envou.
- 9 Goulennet bennoz Doue d'an tadou, d'ar mammou,
Furnez-vad d'ar vugale, vit kerzat n'ho roudou.
- 10 Eus a bep drouk hon miret, Patron karantezuz,
War ho parrouz astennet ho torn madelezuz.
- 11 Binniget tiez, parkou; hon loened diwallet;
Ha war hon oll labouriou, bennoz Doue skuilhet.
- 12 Ra vezo ho pugale bepred gwir gristenien,
Neuze vo mad ho bue ha kaer ho c'hurunen !
- 13 Ha pa vimp er Baradoz, o zant Vaudez karet,
Ni gano d'ac'h mil bennoz hag o karo bepred.